

## KANTIK SANT GWENNOLE

Diskan : O Pastor mat, Sant Gwennole  
 Klevit pedenn ho pugale ;  
 Diwar ho tron er Baradoz  
 Skuilhit warnomp gliz ho pennoz.

- |   |   |   |
|---|---|---|
| <p>1. Sant Gwennole a zo ganet.<br/>       Euz a lignez ar Rouaned<br/>       Fragan e dad, eun den a feiz<br/>       A oa kenderv da roue Breiz.</p> <p>2. Met Gwennole, abred abred<br/>       A zisprigas madou ar bed<br/>       Ha ser pedi hag aspedi<br/>       E c'hellas mont d'eun abati.</p> | <p>3. E lec'h m'ema Landevenneg<br/>       Eul lec'h didrouz ha gwezennek<br/>       Eun d'eus savet eun abati<br/>       Da bedi Doue, d'e veuli.</p> <p>4. Aman gwechall e tigasas<br/>       Daou vanac'h fur ha desket bras<br/>       Evit kroui ar barrez-man<br/>       Kanom eta bennoz d'ezan.</p> | <p>5. Landrevarzec ho kar ato<br/>       Ha d'ho karout a gendalc'ho<br/>       O ! ni o ped Sant Gwennole<br/>       Mirit hor c'horf hag hon ene</p> <p>6. Betek mervel ni a stourmo<br/>       Gant ho sikour ni a drec'ho<br/>       Hag eun devez en ho kichen<br/>       Ni vo eürus da virviken.</p> |
|---|---|---|

## KANTIK ITROUN VARIA QUILINEN

Landerarzec

Diskan : O Gwerc'hez Itroun Quilinen  
 Setu deuet ho pugale  
 Da bedi dirak ho skeudenn  
 O selaouit heb dale.

- |   |  |
|---|--|
| <p>1. C'houi a zo eur Vamm galloudus<br/>       Ni ato prest da goueza<br/>       Hor buhez a zo hirvoudus<br/>       Deuit buhan d'hor skoazella.</p> <p>2. Pec'herien skuiz oc'h hirvoudi<br/>       Dindan skilf an drouk spered<br/>       Galvit prim ar Werc'hez Vari<br/>       Ha ganti c'houi vo salvet.</p> | <p>3. Galvet hed an eternite<br/>       Da veza Mamm da Jezuz<br/>       Evidomp-ni bezit ive<br/>       Eur vamm vad ha truezuz.</p> <p>4. Da virviken er Baradoz<br/>       Gant kalon ni a gano<br/>       Meuleudi ha mil gwech bennoz<br/>       Da Vari fia d'he hano.</p> |
|---|--|

